



Vous êtes ici : [Degemer](#) | [Anavezout Kemper](#) | Tachenn-gampiñ Koad ar C'hloerdi

Tachenn-gampiñ Koad ar C'hloerdi

Mise à jour le : 07.12.2011 | 16h56



E-kreizik-kreiz kêr emañ tachenn-gampiñ Kemper, e koad ar C'hloerdi, un endro a c'hlasvez hag a sioulded.

Kreiz-kêr a c'haller tizhout dindan pemp munud hag ar mor dindan 15 munud.

En dachenn-gampiñ ez eus :

- 74 lec'h en disheol evit teltannoù, karavanennoù ha kirri-kampiñ,
- 2 di bihan gant golc'hiri,
- stagadurioù tredan ouzh bonnoù,
- 1 goudor gant dour tomm evit gwalc'hiñ dilhad ha skaotañ listri,
- 1 takad skarzha evit ar c'hirri-kampiñ. Gallout a reer mont di pa vez digoret degemerva an dachenn-gampiñ

- 1 moned digoust d'ar Genrouedad dre vonn Wifi.

Prizioù (diouzh an deiz)

Oadourien : 3,70 €

Bugale dindan 7 vloaz : 1,85 €

Kirri : 1,85 €

Kirri divrodek 125 cm³ hag ouzhpenn : 0,81 €

Lec'h evit un deltenn : 0,79 €

Lec'h evit ur garavanenn : 1,60 €

Stagadur tredan evit 5 amper : 3,30 €

Parkañ digeflusk eus ar 1añ a viz Mezheven d'an 30 a viz Gwengolo : 7,42 €

Parkañ digeflusk eus ar 1añ a viz Here d'an 31 a viz Mae : 1,60 €

Taos chom : 0,20 € dre zen / deiz

Eurioù digeriñ eus ar 1añ a viz Mezheven d'an 30 a viz Gwengolo

Lun : 13 e - 19 e

Meurzh : 8 e - 11 e / 15 e - 20 e

Merc'her : 9 e - 12 e

Yaou : e e - 11 e / 15 e - 20 e

Gwener : 9 e - 11 e / 15 e - 20 e

Sadorn : 8 e - 12 e / 15 e - 20 e

Sul : 9 e - 11 e

E-maez an eurioù-se, pellgomzit d'ar 02.98.98.89.24.

Tachenn-gampiñ kêr

Bali al Laboused

29000 Kemper

Pgz ha plr 02.98.55.61.09

camping-municipal@quimper.bzh pe michel.pinvidic@quimper.bzh.

Ti-kêr Kemper

44, plasen Sant-Kaourintin

29000 Kemper

Tél. + 33 (0)2 98 98 89 89

Email : contact@quimper.bzh

